

KANTIK CHAPEL SANT DIBOAN

E parrez Tremeven.

Var don : *Bosen Elliant.* (Barzaz-Breiz, p. v.)

DISKAN :

*En hor poaniou, o ni ho ped,
Sant Diboan, n'hon dilezit ket.
En hor poaniou, digant Jezuz,
Goulennit deomp grassou nerzuz.*

Sant Diboan a zo en hor bro
Brudet meurbed, pell amzer zo.
Brema c'hoaz beteg he chapel
E teu pelerined a bell.

Nag a vech eo bet heb dale
D'an dud klanv roët ar pare,
Pa vije græt eur bromessa
Da zont ama da bardona !

Kal a re all 'n ho zremenvan,
Bet erbedet euz Sant Diboan,
'Neuz bet resevet grasou kaer,
Dre veritou ar Zant merzer.

Pa goue var hon enëou kez
Glac'har, anken, tristidigez,
Gant guir fianz ni ra buhan
Eur bedennik da Zant Diboan.

Ouz he bedi, an dud poaniet
A gav d'ho foan eur guir remed ;

D'ho c'honsoli en ho glac'har
Sant Diboan 'neuz eun nerz dispar.

'Vit an Anaon dalc'het en tan
E peder ive Sant Diboan,
Ma teui gant eun dorn truezuz
Da vouga ho foaniou skrijuz.

O Sant ken gallouduz en Ee,
Euz an Anaon ho pet true ;
Kassit da vro an eurusted
Hor c'herent hag hor mignoned.

Plijet ganeoc'h pedi ouzpenn
Evit hor madoberourien,
Ha goulen ma vo diboaniet
An Anaon kez abandonet.

Er Purgator, o Sant Diboan,
Ma koueomp, siouaz ! hon-unan,
Hor zikourit, en han' Doue,
Da zewel heb dale d'an Ee.

IMPRIMATUR :

Kemper, 6 Genver 1908.

F. CORRIGOU, V. g.

Kemper, moulllet e ti de Kerangal.